

Le Bayon (1876 – 1935) Skrivagner gwenedeg. **Le Gall (Yann-Vari ar Gall)** (1885-1975)

An Aotrou Keriolet: bet lakaet e brezoneg Leon gand Yann-Vari ar Gall, bet embannet e 1905.

Modernnaet eo bet an doare skriva. Aliez a-walh e ra an oberour gand ereadurez ar galleg.

An Aotrou Keriolet

“Tragédie” e teir lodenn lakeat e brezoneg Leon,

Gand an Aotr. **LE GALL**
Person ar Folgoad
1905

Anoiou ar re o-deus perz er c'hoari-mañ

An Aotrou Keriolet

Mathurin, mevel koz an Aotrou Keriolet

Frañcès¹, mevel yaouank

Yvon, merer an Aotrou Keriolet

Per, mab Yvon, fillor an Aotrou Keriolet

Izaak², ar sorser

Loaz, bugel

Biel, bugel

Aotrou kure Pleuwigner.

Yann, paotr-yaouank euz ar harter

Michel, paotr-yaouank euz ar harter

Job, paotr-yaouank euz ar harter

Bugale all

¹ Frañcès : skrivet evel-se er skrid orin. Anad eo ez eo “Frañsez”.

² Izaak : eun ano judeo.

Kenta lodenn

Al lodenn genta a dremen e-tal kastell Kerloaz, ti an Aotrou Keriolet, an eiz a viz Gwengolo 1635, deiz pardon Itron Varia a Drugarez.

**Pennad kenta
Mathurin, Frañcès**

Mathurin, azezet war eur skabell vein, a lavar e chapeled.

Frañcès

Ahanta, Mathurin, n'oh ket eet d'ar pardon ?

Mathurin

Nann, Fañch, re yen eo deut da vez a halon
Evid mond da gana, da zañsal d'ar festou,
Evel ma'z een gwechall, pa oa ruz va chodou.

Frañcès

C'hwi 'zo bet koulskoude, gwechall, eur gwall ganer,
Ne gaved ket ho par tro-war-dro er harter.

Mathurin

Ya, ya, em yaouankiz 'm-eus gouezet forz soniou,
Mez bremañ ne ouzon nemed va fedennou.

Frañcès

Ar bedenn a zo kaer d'ar re 'zo war an oad.

Mathurin

War teod ar re yaouank n'ez eus netra ker mad
Hag eur hantik laouen en enor d'ar Werhez.
Allaz ! or hantikou kaer 'vel mouez an Êlez,
Den, war-dro Kerloaz, ne gred mui o lared
Rag aon 'zo e klevfe an aotrou kounnaret.

Frañcès

Mamm an aotrou, gwechall, en amzer ma veve
A blije kalz dezi kleved ar vugale
Bodet war al leton, war-lerh ar gousperou,
Aze, e-tal ar wezenn, o kana kantikou.

Mathurin

Mamm an aotrou, Frañcès, hounnez 'oa eur zantez,
Ker mad evid an oll, ken dous, hag hi mestrez,
Ken devod pa bede, ma kredan heb douetañs

Ez eo eet war-eeun da gaoud he rekompañs.

Frañcès

Piou a hellfe kredi en-deus eun êl ker gwenn
Maget gand karantez eun diaoul war he barlenn !

Mathurin

Eun diaoul, e gwirionez ; mez e vamm ker zantel,
A bed kement 'vitañ, ma teuy da veza êl.

Frañcès

Mathurin, mar deo gwir ar pez a livirit
Me 'baeo kraoñ-kelvez.

Mathurin

O ! va Itron, pedit
Evid ho mab, a zo hanter-gollet,
Pedit, euz barr an Neñv, evid Keriolet.
Gwechall, pa edo c'hoaz krouadur bihanig,
Kousket en e gavell, ker koant hag eun êlig,
Me, sioul hag azezet e-tal korn an oaled
He hleve aliez da Zoue o lared :
« Setu aze va mab, diwallit anezañ,
Rag gwelloh 've ganen 've ar maro gantañ
Eged na ve taget gand ar pehed marvel. »
Eun devez e oa deut ganeom da lavared
Ar bedenn diouz an noz a-raog mond da gousked,
Hag e lakaas va dorn en he dorn, ha, dousig,
Evel pa vije bet o komz ouz he mabig :
« Mathurin, emezi, hag he mouez a grene,
Karit va bugelig, ha goulennit ouz Doue
Ar pez a houllennan-me va-unan bemdez. »
« Goulenn petra, Itron ? », « Ma vo beleg eun deiz. »
Hag abaoe me 'lavar, bemnoz va chapeled
'Vid ma vez o beleg, eun deiz, Keriolet.

Frañcès

Neuze hoh-eus labour gand ho chapeledou,
Rag me 'gred e kollit ho poan, ha pedennou.

Mathurin

Marteze, marteze, rag piou 'hell lavared
Ar pez a zo kuzet en amzer da zoned.

Frañcès

Gwir eo, ha koulskoude, n'ema ket c'hoaz em fenn
E klevin eun devez e genta oferenn.

Mathurin

Aliez Doue 'n-eus greet burzudou brasoh c'hoaz,
'Vid lakaad ar peher da veza eur zant braz.

Frañcès

Ya, ya, mez deuz hemañ, n'oh ket deut c'hoaz a-benn.
Kerkoulz 'vefe gwiska d'an diaoul eur zoudanenn !

Mathurin

Amzer, Frañcès, amzer, spered Keriolet
N'eo ket c'hoaz, marteze, ker fall ha ma kredet³.

Frañcès

N'hell ket beza falloh !... E galon n'eo ket aour,
Gouzoud 'ran ; koulskoude, e-neus evid ar paour
Eun tammig karantez.

Mathurin

Ahanta,

Frañcès

Kant malloz,
Siwaz ! 'glever gantañ deuz ar mintin d'an noz ;
An enor evitañ a zo eet e ludu.
E gounnar hag e aour 'deus lazet ar vertu...
Ar homzou louz a zao euz e galon d'e veg
Evel ma sao ar pri war horre ar feunteun
Pa vez skrabet ar foñs. E galon a zo leun
A bep seurt loustoni, ha c'hwi 'gred 'vo beleg
An hini a ra goap ouz an dud hag ar zent
Hag ouz Doue iveauz pa her hav war e hent !
An hini ne gren mui, zoken rag ar gurun,
Hag a denn en Neñvou ! rag ne 'n-eus aon ouz nikun,
Aon ebed ouz Satan, e vignon milliget.
E gleze gand ar gwad, re aliez ruziet
Atao a zo en noaz evid en em zifenn.

Mathurin

Evid en em zifenn ? Ouz piou en em zifenn ?

Frañcès

Ouz Doue ; rag den all n'hell outañ enebi !

Mathurin

³ ma kredet : ma kredit.

Kaoud a raio e vamm hag ar Werhez Vari !

Frañcès

Ar Werhez ?

Mathurin

Ar Werhez hag e vamm venniget,
Rag n'her gweler Morse o voned da gousked
Heb lavared bemnoz eun Ave Maria
Ha patronez e vamm a zo santez Anna.

Frañcès

O douja 'ra moarvad ?

Mathurin

O hared eo a ra.

Frañcès

O hared, Mathurin, ker brein m'eo e galon !
Nann, nann, n'anavez mui ar garantez wirion.
Rag ne vag e galon nemed gand fallentez...
'Vid me 'zo gwell ganen beva er baourentez,
Heb kleved an arhant oh ober trouz em yalh ;
Gwelloc'h ez eo ganen, ker mintin hag ar voualh,
Kregi em labour, stard, kaled e peb amzer,
Ha kaoud e korn an tan, pa erruan er gêr,
E-leh friko re zruz, eun tamm bara-zegal,
Yod kerh pe pouloudig, pe eun tamm kig-sall,
Ha meur a wech tremen gand eur banne soubenn.
Eur wech ar bloaz hepken kregi er bara gwenn,
Eged beza eüruz eveltañ er bed-mañ,
Ha daonet er bed all da virviken gantañ.

Mathurin

Piou 'oar ? Keriolet, hirio eun den ken fall,
'Hell beza eürusoh 'vidom-ni er bed all.

Frañcès

Neuze, war va buhez, ha n'on ket c'hoaz gwall-goz,
'Lavaran 'vo gwelet an diaoul er baradoz.

Eil pennad

Mathurin, Frañcès, Per (*fillor Keriolet*)

Per

Ohe ! Frañcès, ohe, deuit da staga ar zaout.

Frañcès

Diohtu ; ... Ne vank hini ?

Per

Nann, hini, mez ar maout
E-neus klasket kement mond e park ar gwiniz
Ma'z on, forz da redeg ; deut da veza gwall-skuiz.
(*Frañcès a ya er-mêz*).

Mathurin

Deus amañ em hichenn, Per, azez war ar mean⁴,
Da hortoz ma sono an eur da vond da goan.
Emberr te 'gousko c'hweg pa vi en da wele.

Per

Ya, tonton Mathurin, mez o redeg 'vel-se,
'Lennan ket aliez leor an Aotrou Kure.
Ha d'ober din ar skol, warhoaz vintin pa zeui
Ne ouezin ket ar pez em-eus bet da zeski.

Mathurin

Mad, eun devez all, Per, te 'labouro gwelloh.
Greom hervez on nerz, arabad mond pelloh.
Da dad 'zo eet, moarvad, azaleg ar mintin
D'ar pardon, her gwelet am-eus.

Per

Ya, Mathurin,
Ha me 'bed ar Werhez da rei dezañ sklérder
'Vid ma lavaro din "Ya", oh erruoud er gêr.

Mathurin

"Ya" 'vid petra 'ta, Per ?

Per

'Vid ma hellin eun dez⁵
Dond da veza beleg, oferenna bemdez
En enor d'ar Werhez ha da Zantec Anna.

Mathurin

Da dad 'fell ket dezañ vefes beleg eta ?

⁴ ar mean :Leoneg, bet miret evid ar rim : mén.

⁵ eun dez : eun deiz (evid ar rim).

Per

Nann, tonton Mathurin. Mez me 'gleo mouez Doue,
Lavared a ra din rei va buhe'.
Goulenn 'ra diganen labourad evitañ ;
Em halon her hlevan 'vel pa gomzfen gantañ.

Mathurin

Neuze bez dizoursi, rag eun deiz pe eun all
Doue a zigoro daoulagad ar re zall.
Da dad lavaro "ya"... Mez peleh eo chomet ?

Per

Ar pardon, Mathurin, dezañ a zo plijet,
Hag ar chistr a zo mad.

Mathurin

Hag emberr en distro
War o divesker sempl, kalz tud a vrañsello.

Per

Mab Langroeze, el lanneg 'zo nevez tremenet
En eur gana. Hennez d'ar gêr e-neus kaset
Meur a skudellad chistr ; hag e wreg 'deus gwelet
Va zad o komz gand an Aotrou Keriolet.

Mathurin

(a-gostez)

Evid ar memez tra, diwar-benn e dachenn.

Per

Klevit eur helou all : Mevel Gwigner Kerlenn
E-neus lavaret din e-neus iveau gwelet,
Deh da noz, Izaak, ar sorser koz, azezet
El lanneg war eur mén ; kreñchad a ree en êr
Ha lakaad da yudal ar chas dre ar harter.

Mathurin

A ! Siwaz ! gwaz a ze, ma teu Izaak en-dro,
Rag beza 'vezo c'hoaz gwall euriou⁶ 'barz ar vro.

Per

C'hwi a gred, Mathurin ?

Mathurin

Ya, rag ne garan ket

⁶ euriou : eurveziou.

Gweled en or bro an den-ze milliget.
Lavaret 've zoken : Pa dremen en hentchou
Ar maro gand e falh a gerz war e roudou.

Per

(*Kroazet e zaouarn*)

Diwallit ahanom, O ! mamm Santez Anna.

Trede pennad

Mathurin, Per, Frañcès

Frañcès

Staget em-eus ar zaout ; mez an noz a freska,
Hag hebdale, warnom 'kouezo ar vrumenn noz.
Marteze, Mathurin, ez eo poent deoh fenoz
Kemeret, er gegin, ho plas e korn an tan.

Mathurin

Ya, mad eo an aviz, Frañcès, raktal ez an
D'ober 'vel livirit. Pa em-boa eveldoh
Gwad tomm em gwazied hag eur galon greñvoh,
Ne dehen ket 'vel-se dirag eur vrumennig,
Mez an den koz 'zo sempl 'vel eur hrouadurig.

Pevare pennad

Frañcès, Per

Frañcès

A ! paour-kêz Mathurin, den ker mad, ker zantel !
Pedi 'ra 'vid ma teuy e vestr da veza Êl.
Nag a chapeledou 'n-eus c'hoaz da lavared
A-raog ma teuy e vestr da veza beleget ;
Me 'gred e houlenn re, kalz re digand Doue.

Per

Ar pez a houlenn-eñ, me her goulenn iveauz.
'Vid beza selaouet me 'rofe va buhez,
Va gwad.

Frañcès

A ! bugale, peseurt kalon 'h-eus-c'hwi ?
'Vid doare c'hwi n'oh ket greet evel ma'z om-ni.
C'hwi 'rank beza breudeur Êlez ar Baradoz,

Pazeogwir e hellit kared tud a valloz,
Kared Keriolet ! C'hwi ker glan ha ker pur.

Per

Piou 'gar ket e baeron ? den ebed a-dra-zur.

Frañcès

Êz eo kared eun den pa vev hervez Doue,
Mez evid eun haillon ne roin ket va buhe',
Zoken pa vefe red, evid ma vo salvet ;
E blas, 'kreiz an ifern, gand an diaoul, 'zo greet.

Per

Peoh, Frañcès, me ho ped, na gomzit ket 'vel-se !
Ma'z eus tud fall er bed, gwell eo pedi 'vite,
Rag ene an dud fall en-eus koustet kement
D'or Zalver war ar Groaz, hag ene kaer ar Zent.
Setu perag, bemnoz goude koan me a bed
Or mamm Santez Anna evid Keriolet.

Frañcès

Mad, me 'lavar deoh, me, n'hell ket Santez Anna
Selaou ho pedennou, nann, nann.

Per

Perag eta ?

Frañcès

Diwezatoh, Perig, c'hwi 'glevo 'vid petra...
Ar pardon 'zo echu, an Aotrou 'deu d'ar gêr,
Lez ahanon dezañ da lavared eur ger.

Pempved pennad

Frañcès, Keriolet

Keriolet

Perag n'hoh-hu ket deut d'am hlask a-raog an noz ?

Frañcès

Aotrou Keriolet, amañ 'oan o hortoz.

Keriolet

(*Droug ennañ*)

A ! A ! abred hoh-eus echuet ho labour !

Eun diaoul bennag moarvad a zo deut d'ho sikour,
Da ziskar ar groaz koz evel 'm-oa lavaret.

Frañcès

Da ober al labour hoh-eus din kemennet
N'ez eus deut den, Aotrou, piou 'garfe hen ober ?
Rag diskar ar hroaziou n'eo ket c'hoaz va micher.
Kroaz an hent koz a zo, atao sonn en he sa'
Ha biken va dorn-me ne ray dezi koueza.
Hen lavaret em-eus, lared 'ran a-neve' .

Keriolet

Malloz ruz, piou 'zesk deoh komz evel-se din-me ?
Ha n'eo ket me ar mestr, ha c'hwi Fañch ar merer,
Daoust ha n'oh ket din-me mevel ha servicher
Evid ober raktal ar pez a lavaran deoh ?

Frañcès

Ya, mez en Neñv ez eus eur mestr all kalz brasoh
Eged mistri ar bed, hag hennez a zifenn
Ober kement 'zo fall a-eneb e lezenn.

Keriolet

Hennez eo marteze a ro deoh ho kobrou
Pazeogwir e kredit disprizoud va homzou,
Senti ouz e lezenn ha terri va hini.

Frañcès

'Vel ma lare ho mamm, Aotrou, gwell eo senti
Ouz ar Mestr a zo en Neñv, evid senti ouz an den,
Rag pa zeuy evidom ar mare da dremen
Goude ar vuhez-mañ, berr evel eun huñvre,
Me 'zoñj mond da houllenn digantañ al leve
Gounezet em buhez, rag-se ne glaskan ket
Eveldoh en ifern beza eun deiz taolet.

Keriolet

En ifern, en ifern ! A ! paour-kêz den spontet,
Er bed all-ze n'ez eus na Doue na diaoulou.

Frañcès

A ! paouezit, aotrou, da laoskal malloziou,
Pe warnoh euz an Neñv 'kouezo ar hurunou.

Keriolet

Ba ! an ifern, an diaoul, traou mad evid bugale,
Komzou, mad da sponta ar re 'gred aneze.

Evidon-me, biken, ne grenin dirazo.

Frañcès

Aotrou Keriolet, c'hwi, eun deiz, a greno.

Keriolet

Me, krena, dirag piou ? Ar gurun o tarza
N'hell lakaad war va fenn eur vlevenn da heja.
Kredi 'rit marteze e krenfen 'vel eur had
Ma welfen eun diaoul dirag va daoulagad.
Mar deus⁷ eta diaoulou, me 'garfe o gweled.
Pell 'zo o gortozan, mez lent int 'vel pesked.
Ohe ! Satan, deus 'ta ; mar dout skuiz o leski,
Me a ya, mar kerez, d'az klask ha da derri
Da chadennou ; deus 'ta ! rag me 'garfe gouzoud
Pe te a zo evidon pe me 'zo evidout.
Rag 'vid bete vremañ, n'em-eus ket c'hoaz kavet
Unan bennag par din tro-war-dro, dre ar bed...
Ahanta, ne deuit ket, bremañ pa'z oh galvet ?
Deuit eta da weled ! va hleze 'zo lemmet ;
Va hleze 'n-eus skuillet e-pad va yaouankiz
Gwad a-walh 'vid liva ouspenn kant dor iliz.
Ya, sur on, krena 'rit dirag Keriolet !
Dirazañ, en ho raog, kalz re all 'deus krenet.

Frañcès

Tavit, Aotrou, tavit, en an' Doue, me ho ped.
(A-gostez)
'Vid va Itron Anna, 'zo bremañ en Neñvou,
Pebez anken kleved gand he mab seurt komzou !

Keriolet

Etre da zent, marmouz, petra leverez-te ?

Frañcès

Aotrou Keriolet, pedi 'ran va Doue.

Keriolet

Amzer a-walh ho-po d'her pedi el lanneg vraz
Pa vo greet ho labour ha diskaret ar Groaz.
Kerzit eta du-hont raktal da labourad,
Kerzit, mevel daonet ; me 'fell din, klevit mad,
He gweled 'raog an noz, a-dammou d'an douar...
Ahanta, 'glevit ket ? bremañ ez oh bouzar ?

⁷ Mar deus : ma'z eus

Frañcès

Aotrou, me n'on ket greet evid al labour-ze,
 Rag, 'vel pep kristen mad, me 'm-eus doujañs Doue,
 Ha ne rin ket ar pez a zifenn e lezenn.

Keriolet

(*O tihouina e gleze*)

Sent, kristen milliget, pe raktal deuz da benn,
 Bremaig, gwad a strinko hag iveau an empenn.

Frañcès

Skoit 'ta, kentoh ez in da weled va Doue,
 E gloar ar baradoz 'welin ho mamm ive'.

Keriolet

Va mamm, A ! ya, va mamm !

Frañcès

M'he gwel c'hoaz o pedi

Dirag kroaz an Hent-koz.

Keriolet

Mad, 'vid plijoud dezi,
 Evid douja d'am mamm, ne dreuzin ket hirio
 Ho korv gand va hleze. Mez ma fell deoh chom beo,
 Tehit, tehit raktal, rag warhoaz marteze,
 Ma welan ahanoh, n'em-bo mui a drue'.
 Kerzit da glask labour, it da di eur mestr all.

Frañcès

Aotrou, keit ha ma kavin eun tamm bara-zegal
 Da lakaad em genou, me 'lavaro bennoz
 D'ho mamm ; mar don c'hoaz beo, hi hepken a zo kaoz.

C'hwehved pennad

Keriolet

(*E-unan*)

Kredi 'ran oh eüruz, hirio, va mamm garet.
 Evidoh on chomet heb ober eun torfed,
 Rag evid plijoud deoh ez on bet mad eur wech,
 Pa 'm-eus klevet ho mouez, on chomet direbech.
 Ar vouez-se a gomz din, heh anaoud a ran mad,
 Aliez e karfen dont d'heh ankounac'haad
 Pa houlenn diganen beza mad e leh fall,

Ez eo hirio ken dous, ken tener ha gwechall :
« Va mab Per, emezi, dalh soñj mad em homzou
Pe Doue gastizo abred da behejou. »
Doue ! mar deus unan⁸, m'her gortoz heb krena,
Ha va oll dorfejou, m'en-deus c'hoant kastiza,
E kavo ahanon, hirio koulz ha warhoaz
En hent ar blijadur, rag n'on ket re skuiz c'hoaz.

Seizved pennad

Keriolet hag Izaak

Izaak

A ! setu eur gomz vad, Aotrou Keriolet,
Eur gomz 'vel ma ouzoh-chwi hepken lavared,
Hag a laka an diaoul en ifern da hoarzin.

Keriolet

N'eo ket bet aliez trist abalamour din,
Izaak - Abaoe pegoulz ez oh-chwi deut en-dro ?

Izaak

Abaoe deh da noz, Aotrou, ez on⁹ er vro.
Me 'zo deut d'ar pardon, 'vid dastum gwenneien,
Va reñk 'm-eus kemeret e-touez an oll beorien
A weler o pedi tro-war-dro d'ar feunteun ;
Mez siwaz din, va yalh n'eo ket bet hanter leun.
An dud ne deuont mui da zelaou ar sorser,
Moarvad 'vezo red din dilezel va micher.

Keriolet

N'eus ket c'hoaz pemp sizun 'm-eus roet deoh kant skoed.
Eet int gand an avel moarvad ?

Izaak

 Ya, dispignet,
Mez, Aotrou, c'hwi hoh-eus peadra evid daou !
Ha n'hoh-eus ket c'hoaz din paeet va labourou ;
Ma karfeh adarre rei din nebeud skoejou.

Keriolet

Malloz ruz, arhant c'hoaz ?

⁸ mar deus unan : ma'z eus unan.

⁹ ez on : emaon

Izaak

Goustadig, me ho ped,
Rag me n'on ket bouzar, ne gredan ket 've red
Komz din a-bouez ar penn.

Keriolet

Komzom eta sioulloh.
Mez me a garfe petra 'dlean c'hoaz deoh.

Izaak

An eürusted, Aotrou.

Keriolet

Penaoz e hellfen-me
Rei deoh-c'hwi, sorser koz, ar pez a galskan ive'.

Izaak

Evid beza eüruz, Aotrou, ne houllennan
Nemed eur skabellig en ho ti, 'korn an tan.
Rag eur servicher koz pa n'hell mui labourad
A lezer da repoz ; diskuiza a ra vad.
Evel gwechall, Aotrou, me 'hello marteze
Ho sikour da ober troiou-kamm adarre.

Keriolet

Nann, n'hellan ket rei deoh ar pez a houllennit.

Izaak

Ha koulskoude, Aotrou, me 'm-eus hen gounezet.
Evidoh 'm-eus poaniet.

Keriolet

Ya, ha paeet oh bet.

Izaak

Ne heller ket, Aotrou, paea va labourou.
Ha c'hwi a hell zoken priza an dañjerou
'Zo bet ken aliez skignet a-zioh d'am fenn,
Pa 'm-eus lazet kement euz hoh enebourien.
N'hoh-eus mui soñj moarvad ez on-me bet stlejet
A-dreuz leur-gêr Alre evid beza krouget,
Pa oa kavet maro merh yaouank Toull-ar-goug.
Kredi 'ran ema c'hoaz ar gordenn em gouzoug,
Ma ne vijet ket deut an diaoul d'am distaga
E vijen bet bremañ en eun toull o vreina ;
O vreina en ho leh, Aotrou Keriolet.

Keriolet

Gwir eo, ya, rei 'rin deoh arhant,... aour ma karet¹⁰.

Izaak

Nann, nann, ne houllennan diganeoh netra ken,
Nemed, evel ho ki, beva en ho kichenn.
Pa viot eet er-mêz, me 'ziwallo an ti,
Hag hini ne dostay pa welo beg va fri.

Keriolet

N'hellan ket koulskoude ho maga 'vid netra.

Izaak

Me 'hell c'hoaz, ha me koz, evidoh meur a dra,
An traou n'heller ober nemed e-pad an noz,
Pa vez ar gristenien o kemer o repoz.
Traou iskiz ha spontuz, a ra d'an dud krena
Ha zoken d'an daoulin, a ra dezo koueza.

Keriolet

Mad, chomit, mez bevit e peoh gand Mathurin.

Izaak

Gand piou ?

Keriolet

Gand Mathurin, a gar kement Doue,
Hag e-neus servichtet va mamm 'pad he buhe'.

Izaak

Bezit dineh, Aotrou, me 'oar mad, pa vez red,
Ken devod ha forz piou, lared va chapeled.

Keriolet

Faoz a-walh oh evid-se ; chomit eta en ti.
Boued 'vezo 'vidoh, keit ma vo 'vid ar hi.

Izaak

'Vid ho trugarekaad, e korn an tan, ama',
Me 'lavaro 'vidoh, va chapeled kenta...
Na hoarxit ket, Aotrou, kerkoulz hag ar re all
Me 'bede ar Werhez a-greiz kalon gwechall.
Meur a wech ez on bet en he chapel du-hont
E-tal al lanneg vraz, 'zo anvet "Lann ar Mont".
He fedi em-eus greet 'vel ma ouzon pedi,

¹⁰ ma karet : ma karit 'evid ar rim).

Lakaet em-eus gouloù dirazi da zevi.
Mez biskoaz ar Werhez n'he-deus va zelaouet,
Ha da houde, pell 'zo, em-eus he dilezet !...
Ouspenn zo, piou morse 'n-eus gwelet ar Werhez ?
Evidon, me 'lavar, amañ, e gwirionez,
Ne gredan nag enni, na zoken e Doue.
N'em-eus kredet morse nemed en eur roue.
An diaoul eo ar roue em-eus bepred karet.
Ar pez a lavaran ne blij ket deoh, me 'gred,
Peogwir e chomit mud, heb lared ger ebed.

Keriolet

Kalz re hir eo teod, er wech-mañ, koz sorser !

Izaak

A ! o komz 'vel ma ran, ne glasken 'med ober
Eun tamm plijadur deoh... me 'hell dont war va hiz...

Keriolet

Evid beza furroh, klevit mad eun aviz :
Keit ma viot lojet ha bevet e va zi,
E tifennan deoh komz deuz ar Werhez Vari,
Pe m'ho stlapo er-mêz, malloz ruz, 'vel eur hi.
Klevet hoh-eus, Izaak ?

Izaak

Ya, rag me 'glev a-bell.
Hag e-kreiz ho kalon e klevan an avel
O c'hweza a bep tu ; ho kalon 'zo digor
Da gement a dremen, 'vel eur hoz ti heb dor.
C'hwi a zelaou hemañ, selaou a rit hennez,
Selaou a rit an diaoul hag iveau ar Werhez.
Hirio c'hwi 'zo mignon d'an diaoul hag antronoz
C'hwi 'halvo d'ho sikour oll zent ar baradoz.
Gwechall, m'her goar, Aotrou, c'hwi a oa kalz kreñvoh.
E chapel ho kalon ne oa nemed eur hloh !
Ne oa 'med eun aoter, Aotrou, evid an oferenn,
Aoter an droug-spered, roue du an ifern.

Keriolet

Kaer o-deus labourad, an diaoul hag ar zent,
Me 'zo mestr d'am halon, kerkoulz ha diagent,
Ha ne lakin enni, nag an diaoul nag e hoar,
Na sent ar baradoz, na Doue, m'hen lavar.

Izaak

N'eo ket êz da gredi, ha dreist-oll p'ho klever

O komz deuz ar Werhez gand kemend a zouster,
Chomet on sebezet.

Keriolet

Muioh e vezot c'hoaz,
Klevit : Keriolet a lavar beb mintin
Hag a-greiz e galon, stouet war e zaoulin,
Eun "Ave Maria".

Izaak

Mall braz eo deoh neuze,
En eur gouent bennag mond da wiska eur zae.
Ne ve ket c'hoarzet kalz e marhad kér Alre !
Pa vezoo klevet komz deuz ar mirakl braz-se.
(*Keriolet a ziskouez ema o vond kuit*).
Moarvad ez it bremañ da bedi ho Kwerhez,
Evidon, me 'jomo eur pennad c'hoaz er-mêz,
'Vid gweled ar stered o lintra a-zioh kér ;
N'ez eus netra kuzet da lagad ar sorser.
Heñvel ar pez a vo hag ar pez a zo bet.
Warhoaz me laro deoh ar pez am-bo gwelet.

Keriolet

Ne ouezin ket a-raog ? nozvez vad deoh neuze.

Izaak

Aotrou Keriolet, nozvez vad deoh ive'

Eizved pennad

Izaak (*e-unan*).

Ya, sao da benn d'an neh, Izaak, ar sorser koz.
Sell mad ouz ar stered, a lintr e-kreiz an noz.
Nag a stered hirio a welan 'zioh d'am fenn.
Setu an hini hlaz o tond da veza gwenn ?
Nann, nann, n'ez eus netra kuzet 'vid ar sorser,
Ar pez na ra den all, me a hell hen ober.
Lenn e leor an ene hag e kalon peb den,
O weled peseurt liou he-deus e steredenn.
Hini Geriolet a welan mad aze,
Siwaz, dre Jupiter, cheñchet he-deus doare.
Beteg-henn e lintre glaz bepred 'kreiz an noz,
Hag hirio en eun taol ez eo gwenn, mil malloz.
Unan bennag ouzin a zo oh enebi
Hag a ra d'e zoñjou ha d'e spered trei.

Mez, ha pa ve red din, ‘vid echui va labour
Gervel an oll diaoulou evid rei din sikour,
Ar had ne deho ket digand ar chaseour.
Ha pa vefe red din beva c’hoaz pell amzer,
Me ‘bromet deoh, Satan, eun deiz, Keriolet,
E-kreiz puñs an ifern, ganeoh a vezos losket.

Eil lodenn

(An dra-mañ a dremen e “Lann ar Mont”, e-tal kroaz ar Goz-Hent)

Kenta pennad

Mathurin, Per, Biel, Loaz (mesaerien).

Mathurin

(Azezet war eur mén e-kreiz ar vandenn).
Ya, va bugaligou, gwechall goz ez eus bet,
Hervez ar pez am-eus dalhmad klevet lared,
Eur chapelig dister savet en eur mêzou
Bet anvet gand an oll, a-bell ‘zo “Bosennou”.
Ma’z it eun dro bennag beteg Santez-Anna
‘Vezo diskouezet deoh ar park el leh ma oa.
On tadou, bugale, a yee di aliez
Da bedi Santez Anna, Rouanez Bro-Vreiz.
Ar chapel a gouezas skoet gand ar gozni.
‘Vel-se Santez Anna en em gavas heb ti.
Ne oa chomet netra ‘med eun imaj kuzet
En douar ; warnezañ ar yeot a oa savet.

Biel

Mez, tonton Mathurin, an dud ne ouient ket
Ez oa Santez Anna bet evel-se kuzet ?

Mathurin

An dud, va bugale, nann, ne ouient netra,
Mez eun dra vurzuduz a deue d’o sponta.

Per

Petra ‘ta, Mathurin ?

Mathurin

Den ebed ne helle
Tremen gand an arar, iskiz eo kement-se,
Dre al leh m’oa savet chapel Santez Anna.

Loaz

Den ne helle arad ? Petra 'oa kaoz eta ?

Mathurin

Kaer o-doa an dud komz brao pe rust ouz al loened,
Pa zegouezent eno, atao 'choment mouzet.

Loaz

Gwelet 'h-eus anezo o chom evel-se a-zav ?

Mathurin

Nann, n'eo ket red gweled evid kredi eun dra,
Mez her hlevet am-eus gand ar re 'deus gwelet.

Per

Ha goude, Mathurin, petra 'oa degouezet ?

Mathurin

Goude-ze, klevit mad, ha pell amzer goude,
En dachenn leton-ze, hini ne dremene
Heb ober sin ar Groaz.

Loaz

Heb ober sin ar Groaz ?

Mathurin

Ya, gand spont ha respect. Bremañ ez eus deg vloaz,
Eun den deuz Kêranna, anvet Nikolazig,
Aliez a welas, e-kreiz eur splannder vraz
Or Mamm, Santez Anna, ha ganti e klevas
E peleh 'oa kuzet heh imaj benniget.
Ha setu, bugale, penaoz e-neus kavet
Nikolazig imaj or Patronez karet¹¹.

Per

Ni 'garfe mond iveau, eun deiz da bardona,
Da weled an traou kaer 'zo e Santez-Anna.
Rag ni 'gar anezi hag on-deus eur hantik
Greet evid enori Itron Nikolazig.
Ma ra plijadur deoh, ni a ya da gana
Ar hantik nevez greet d'or Mamm Santez Anna.

Mathurin

¹¹ Nikolazig imaj or Patronez karet : lenn ar pez e-neus skrivet Anatole France diwar-benn an afer-ze. Evel-just ez eo disheñvel-braz diouz ar pez bet skrivet gand Bayon.

Kanit, bugale, plijadur 'reot din,
Meuli Santez Anna eo pedenn Mathurin.

Kantik

Deut om, O ! Mamm Santez Anna,
Rouanez ar Vretoned,
D'ho pedi beteg Kêranna
En ho ti benniget
Deut om da houlenn diganeoh
Pedi 'n Aotrou Doue
'Vid ma hellim beza kreñvoh
'Eneb ar fallente'.

Unan

Santez Anna, O ! Mamm garet,
Mamm ar vugaligou,
Roit sklêrijenn d'or spered
Ha nerz d'or halonou.
Kreskit, O ! Mamm garantezuz,
Kreskit or harantez
Evid ho mab bihan Jezuz
E-pad on oll vuhez.

Mathurin

Sellit, sellit, du-hont... Red war-lerh da zeñved,
Biel, ha kerz buan, emaint oll o lammed
E park ar gwiniz.

Per

Ya, ya, hag e park va zad !

Oll

(Asamblez)
Kerz 'ta !

Biel

Raktal, eet on, ne raint ket re govad.

Mathurin

'Vidoh-c'hwi, bugale, kanit c'hoaz eur houblad,
Da hortoz ma vezodistro ho kamarad.
Livirit ar houblad 'zo evid ar peher,
'Vid ma vezodoue truezuz 'n e geñver.

Ar vugale

O ! Santez Anna, ni ho ped
Evid ar beherien,

Evid an eneou touellet
Gand hoh enebourien.
O ! Mamm, outo bezit true'
Emaint war an hent fall,
Koulskoude int ho pugale
Kerkoulz hag ar re all.

Eil pennad

Ar memez re ha Biel

Biel

A ! tonton Mathurin, amañ 'z eus eur goulenn deoh¹² ;
Ema Keriolet o tond beteg ennoh.

Loaz

Heñ ! petra leverez ; erru Keriolet.
Me 'ya pell ahalenn, 'fell ket din e weled.

Biel

O ! na me kennebeud.

Mathurin

Ma ra va mestr aon deoh,
N'hoh-eus oll da ober nemed tehed pelloh.

Per

Ma karit, Mathurin, me 'jomo 'n ho kichenn.

Mathurin

Nann, nann, te kennebeud, kerz ganto da hoari.
Gwelloc'h eo beza kalz 'vid ober ar barti.

Per

Mad, tonton, kenavo.

Trede pennad

Mathurin

(E-unan).

An Aotrou o redeg war va lerh ker mintin !
Petra 'hellfe beza ? petra 'lavaro din ?

¹² eur goulenn deoh : galleg : eur goulenn diganeoh.

Gwall zoñjou adarre a zo en e spered !
Aon em-eus, kroaz santel, 'veh hirio diaskaret.

Pevare pennad

Mathurin, Frañcès

Frañcès

Diskaret, Mathurin, petra 'h-eus lavaret ?
Biken, tra ma vin beo, d'an traoñ ne vo taolet.

Mathurin

A ! Frañcès, c'hwi amañ ?

Frañcès

Ya, tonton Mathurin,
Amañ 'ven aliez¹³, da noz pe da vintin,
Evid diwall ar Groaz ez oar¹⁴ o klask diskar,
Ha keit ha ma vezoo dindan va zreid douar
Ne welot ket ar Groaz bruzunet a-dammou.

Mathurin

A ! plijadur am-eus o kleved ho komzou ;
C'hwi a zo eur hristen, Frañcès, 'vel on tadou,
Mez goude ma'z oh bet deuz ar maner tehet,
Livirit din, Frañcès, penaooz hoh-eus bevet ?
Kavet hoh-eus labour ?

Frañcès

Ya, rag war an douar,
Al labour ne vank ket nemed d'an neb na gar.
E pep kér e kavan ha bevañs ha labour,
Rag bremañ, Mathurin, me a zo devezour.
Me 'ya a gér da gér, va benveg war va skoaz ;
Hirio e trohan lann e mereuri Fañch vraz.
Pa 'm-eus klevet kana, ez on deut da weled
Ha da houlenn ouzoh doare Keriolet.

Mathurin

Bremaig en em gavo, Frañcès, ha ma karet¹⁵
Gortoz, Kroaz ar Goz-Hent ne vo ket diskaret.

¹³ Amañ 'ven aliez : e vezan

¹⁴ ez oar : e ouezer.

¹⁵ ma karet : ma karit.

Frañcès

Gortoz 'rin, Mathurin.

Mathurin

Mad.

Frañcès

Ya, me a jomo,
Beteg gweled ar Groaz... ha neuze... m'her lazo.

Mathurin

O ! Frañcès.

Frañcès

'Vid an dud 'n em zav 'eneb Doue
Or halon he-deus bet atao re a drue'.
Her hleved 'ran o tond ; gwell 've din marteze
A-raog 'vo degouezet, mond eun tamm a-goste'.

Mathurin

Ya, Frañcès, mad a rit.

Pempved pennad

Mathurin, Keriolet

Keriolet

A ! paour-kêz Mathurin,
War ho lerh e redan azaleg ar mintin,
Rag hirio, c'hwi hepken a hell va honsoli !

Mathurin

Petra 'zegouez eta, petra 'zo a-nevez ?
Aotrou.

Keriolet

Eun dra iskiz ha nevez em buhez,
Ha deoh-c'hwi da genta 'fell din hen lavared,
Rag c'hwi dreist ar re all a gendalh d'am hared !

Mathurin

Ya, va mestr, me a gar atao mab ar Zantez
He-deus bet evidon kemend a vadelez.

Keriolet

Klevit 'ta, Mathurin, ar pez 'zo a-nevez.

Abaoe hanternoz, me a gred e Doue.

Mathurin

Ha klevet mad am-eus ? Livirit adarre.

Keriolet

Ya, bremañ koulz ha c'hwi, me a gred e Doue.

Mathurin

O ! pebez levenez em halon a zantan
O kleved ho komzou.

Keriolet

Ya, ya, kredi a ran.

Mathurin

Mez perag e krenit o lared kement-se ?

Keriolet

O ! ya, krena a ran, ha piou all na gredfe
Ha c'hwi ivez em leh, c'hwi ho-pefe krenet,
O weled, 'kreiz an noz, ar pez 'm-eus-me gwelet.
Ya, krena a ran c'hoaz hag atao me 'greno
Ken a ouezin ervad Doue am fardono.

Mathurin

N'ho-pet douetañs ebed, Aotrou, war gement-se
Rag rei ar pardon eo micher an Aotrou Doue.
Mez livirit, m'ho ped, ar pez hoh-eus gwelet.
Livirit din penaoz Doue 'n-eus ho spontet.

Keriolet

O ! Mathurin, an noz a-bez 'm-eus tremenet
E goueled an ifern, e-mesk ar re zaonet.

Mathurin

Hag an diaoulou, Aotrou, n'o-deus ket ho talhet ?

Keriolet

Nann, Mathurin.

Mathurin

Neuze unan bennag kreñvoh
Eged an oll diaoulou a zo a-du ganeoh.
Santez Anna, moarvad, he-deus ho tiwallet.
A ! mil bennoz dezi ha d'he merh venniget.
Mez kontit din, mar plij, an huñvre hoh-eus bet.

Keriolet

Ar pez am-eus gwelet n'eo ket eun huñvre,
Mathurin... Eet e oan e koulz mad d'am gwele,
Ha war-dro hanternoz me 'n em zant o tiskenn
Ker buan ha ma kouez ar glao deuz ar goabrenn,
En eun toull don ha striz evel eur puñs, ha teñval
'Vel an nozvez hoan¹⁶ pa n'eus ket a stered,
Diskenn 'ran 'vel-se, a-bez, korv ha spered,
Va daoulagad spontet, digor e-kreiz an noz,
Hag heb gouzoud, siwaz ! petra 'm-oa da hortoz ?

Mathurin

O ! va Zalver Jezuz.

Keriolet

Kerkent en em gavan

E-tal dor an ifern, ha warni e welan
Gand lizerennou tan ar homzou-mañ skrivet :
« Lezit peb esperañs, pa'z oh amañ lonket. »
Gweled 'ran eun toull striz evel genou eur forn,
Diwallet gand an diaoul, eur forh hir en e zorn.
Kaset, en despet din, don e-barz an toull-ze,
'Kreiz an deñvalijenn a bep tu me wele
Naered louz ha preñved war ar fank o ruza,
Ha touseged warnon a bep tu o sailla.
Me 'gerze en o mesk heb kleved trouz ebed,
C'hoant em-boa da grial ha krial n'hellen ket ;
Gand ar moged flériuz e oan prest da vouga,
Eun tan beo dre va horv 'rede heb ehana,
Beteg mel va eskern a zanten o vervi ;
Kleved a reen eur vouez, atao memez hini :
Ped eur a zo sonet ?.... Eternite...
Hag an oll dud daonet kerkent ha m'her hlevent,
'N em lakeent da yudal ha da skrigna o dent,
Ha me, ouz o hleved a lavare ive' :
Setu aze va lod 'vid an eternite,
Daonet on evelto, daonet da virviken,
Ha va halon em hreiz a oa leun a anken !

Mathurin

Penaoz hoh-eus gallet tehed deuz al leh-se ?

Keriolet

Oh ober sin ar groaz, o lared adarre

¹⁶ an nozvez hoan : ?

Va "Ave Maria", ha sur on, ar Werhez
Euz lein ar Baradoz 'deus klevet va mouez ;
Rag kerkent em gwele ez on en em gavet
Beo-mad dre hrsas Doue ha da vad divunet.
Mez piou a lavaro pebez spont hag anken
A zo war va spered ! nann, den ne hell kompreñ.
Pa welan ar bern fank a zo war va halon ;
A ! paour-kêz Mathurin, penaõz goulenn pardon ?
Penaõz 'hellfe Doue ouzin ober eur zell ?
(*Koueza a ra d'an daoulin dirag ar groaz*).
O ! Jezuz, va Zalver, dirag ho Kroaz santel,
Peher ma'z on ! karget a behejou mezuz,
Me 'n em daol d'an daoulin, hag ho ped, O ! Jezuz,
Dizammit va ene deuz beh e behejou,
Ha gwalhit anezañ e gwad ho kouliou.

Mathurin

Fiziañs, fiziañs, Aotrou, penaõz 'hellfe Doue
Chom heb dond d'ho selaou pa bedit evel-se ?

Keriolet

Mathurin, me 'zo bet ker fall beteg hirio !

Mathurin

An den 'hell cheñch atao, e-pad ma'z eo c'hoaz beo.

Keriolet

Beteg-henn n'em-eus greet nemed hada gwall louzou.

Mathurin

Mez c'hwi 'hell o leski e tan ar vertuziou.

Keriolet

Em halon-me n'ez eus 'med fank ha loustoni !

Mathurin

Gand eun taol skubellenn, c'hwi a netay an ti.

Keriolet

Evid e walhi mad me ray ar pez 'zo red,
Mez goude, Mathurin, goude ma vezin gwalhet
'Vid va oll fehejou, penaõz e hellin paea ?

Mathurin

Doue a ziskouezo an hent 'h-eus da heulia.

Keriolet

Evid eur peher braz, siwaz, 'vel ma'z on-me
N'ez eus nemed eun hent da vond da gaoud Doue.

Mathurin

Gwir 'livirit, Aotrou, n'ez eus nemed eun hent,
Mez an hent-se a gas d'an neñvou kalz a zent,
An hent-se 'zo anvet hent striz ar binijenn.
Kemerit anezañ, na zistroit ket ho penn
Da zelled war ho lerh, dalhit mad, da hortoz
Ma plijo gand Doue rei deoh e Varadoz.

Keriolet

'Vid ober pinijenn, me 'lez va feadra,
En eur gouent bennag, me 'fell din 'n em denna,
Mathurin ; ha raktal evid se 'm-eus soñjet
Mond da houlenn digor da di ar Chartreuzed.

Mathurin

A ! perag eo maro ho mamm, an itron vad,
Daelou a levenez 'vije 'n he daoulagad,
O weled he mab Per o kemered an hent
A ziskoueze dezañ. Ya, kerzit d'ar gouent,
Eno, 'hed ho puhez, c'hwi a ray pinijenn.
Hebdale hoh ene 'deuy da veza ker gwenn
Ma chomo an Élez souezet ouz e weled.
(*Klevet e vez ar vugale o kana an trede koublad*).

Keriolet

D'ar Zent ha d'ar Werhez o-deus va diwallet
Deom bremañ, Mathurin, da lavared bennoz¹⁷.

C'hwehvèd pennad

Frañcès

(*E-unan*)

A-dreg ar harz edon o selaou anezo.
Klevet am-eus ar pez 'lavarent etrezo.
Souezet-meurbed ez on ! N'ez eus ket eun eur c'hoaz
Me am-bije roet gounidegez eur bloaz¹⁸
D'an hini 'vije deut da rei d'anaoud din
'Tlee Keriolet d'an diaoulou trei kein.
Chomet on sebezet... An teodou 'z ay en-dro,
Ha sur on, dizamant an oll a lavaro :

¹⁷ da lavared bennoz : bennoz Doue.

¹⁸ eur bloaz : eur bloavez.

'N Aotrou Keriolet a ree goap ouz Doue,
Diwar-goust an ifern hag an diaoul e c'hoarze !
A ! A ! Lezet en-deus ar zon-ze a-gostez,
Ober 'ray pinijenn ar rest euz e vuhez.
Gwell a ze 'velato, ma touj bremañ Doue...
Gand ma chomo atao eeun war an hent-se !
Mez kleved a ran trouz.

Seizved pennad

Frañcès, Izaak

Frañcès

C'hwi, Izaak, ken abred ?

Izaak

Ya, Frañcès.

Frañcès

Daoust ma'z eo erru koz, eur hi mad
A gar c'hoaz a-wechou redeg war-lerh ar had.

Izaak

Ma n'hoh-eus ket traou all bravoh da lared din...

Frañcès

A ! 'mezaon n'ez oh ket war ho tu da vintin,
Red e vezoo moarvad komz deoh war an daoulin...
Mez... ma komzan brao deoh, c'hwi 'laro marteze
Perag ez oh¹⁹ amañ ken abred o vale ?

Izaak

Kredi 'ran e hellan, evel an oll gristenien
Dond amañ 'tal ar Groaz, da ober va fedenn.
Hag oupsenn, klevit mad, eur marmouz 'veldoh-c'hwi
Ne zifeno ket din mond er-mêz euz va zi,
Evid dond, m'am-eus c'hoant, dirag kroaz or Zalver
Da lared beb mintin ha bemnoz va "fater".

Frañcès

O ! O ! va henderv brao, cheñchet hoh-eus micher ?
Mar deo o pedi Doue 'tremenit hoh amzer,
Klevet 'm-eus lavared e teu d'an den spered
Pa deu koz... Kamarad, c'hwi a zo gwall goseet.

¹⁹ ez oh : emaoh.

Izaak

Tavit ho farserez, Frañcès, rag me n'on ket
War va zu da hoarzin hirio 'vel ma welet²⁰.

Frañcès

Me em-boa koulskoude eur helou da rei deoh,
Eur helou braz.

Izaak

A ! peseurt kelou 'zo ganeoh ?

Frañcès

Eur helou hag a ray d'eur hristen 'vel ma'z oh
Eur blijadur dispar.

Izaak

Komzit eta buan,
Rag n'em-eus ket amzer da goll ganeoh amañ.

Frañcès

Selaouit mad, Izaak, va henderv, selaouit,
Hag evid kleved gwell va helou, digorit
Ho skouarn dehou kerkoulz hag ho skouarn gleiz ;
N'hoh-eus mui da zrailla pedennou a-leiz
Evid ho mestr, an Aotrou Keriolet.

Izaak

A !

Den ebed n'hell eta dont d'e convertisa ?
Ha koulskoude bemdez me bedo a-awalah²¹,
'Vid am vije eun deiz deut da veza manah.

Frañcès

Ho pedenn da Zoue 'vid doare 'zo plijet,
Rag en noz-mañ zoken ez eo bet selaouet.

Izaak

A !

Frañcès

Ya, Keriolet, spontet dre eun huñvre,
Abaoe an noz-mañ a gred en eun Doue,
Hag hebdale, hirio zoken, 'z a da houleñn

²⁰ ma welet : ma welit.

²¹ a-awalah : stumm Leon : a-walh (evid ar rim).

Eur plas en eur gouent da ober pinijenn.

Izaak

Ha gouzoud a rit-hu war-zu peleh ez a ?

Frañcès

Da di ar Chartreuzed ; c'hoant hoh-eus d'hen heulia ?

Eur hi mad ha fidel a heuill e vestr bepred,

Setu aze an hent, it iveau mar karet²².

Izaak

Mil malloz ruz ! kanfard, c'hwi n'hoh-eus ken micher

Nemed flemma 'r re all ha lavared gevier.

Diwallit na gouezfe warnoh malloz Doue.

Frañcès

N'em-eus lavaret deoh nemed ar wirione',

Izaak.

Izaak

Ya, ya, ha me a lavar iveau deoh
Ma c'hoarzit hirio din, ne hoarzot mui pelloh.
Warhoaz marteze.

Frañcès

O ! klask a rit va sponta !
N'eo ket c'hwi, koulskoude, am lakay da grena.
Ha pazeogwir n'ez eus amañ nemed on-daou,
Me ho ped da zelaou hag hep trouz va homzou.
Pell 'zo m'hoh anavez, Izaak, hag a-bell 'zo
Eh ouzon nag a zroug hoh-eus greet dre ar vro.
Ho plasfemou spontuz 'eneb Doue savet,
An torfejou mezuz ha kement tra 'h-eus greet.

Izaak

A-walh.

Frañcès

(*Oh ober dezañ chom*).

O ! gortozit, c'hoaz 'm-eus da lavared.
Hirio, amañ zoken, hervez em-eus klevet,
E oa evidoh-c'hwi an devez da ober
Eun dra, a ra hebken an dud deuz ho micher.
Eun dra ken divalo, ma n'ez eus nemedoh
Gouest d'hen ober.

²² mar karet : mar karit.

Izaak

Mar plij, evid komz, deom pelloh.

Frañcès

Nompas, komzom amañ, loen fall ha koz sorser !
Amañ e-kreiz al lann, dirag kroaz or Zalver.
Ar Groaz savet pell 'zo 'vid on diwall bepred
Hag a glaskit diskar, ya, c'hwi den milliget.

Izaak

Me, diskar eur groaz ! A ! setu c'hoaz eur helou !
N'ez eus ket eur hristen startoh 'n e greañsou.
Nann, nag er barrez-mañ, nag e leh all tro-war-dro.

Frañcès

C'hwi, eur hristen ! Siwaz ! ya, eun diaoul deut er vro
'Vid hada en on touez pep seurt fallagriez.
Deuz ar mintin d'an noz, petra 'rit-hu bemdez ?

Izaak

Lared va chapeled, Frañcès, pedi Doue.

Frañcès

Ya, en deiz ma'z oh deut da veva d'ar maner,
Ha me, gand hoh Aotrou, kaset kuit 'vel eul laer,
C'hwi hoh-eus greet an neuz, Izaak, da cheñch buhe'
War an hent hag er park pep hini ho kwele
Gand eur hoz chapeled en ho torn o vale.
Mez ar bleiz n'en-deus greet nemed cheñch e grohenn,
'Vid golo ar zae du, c'hwi 'laka unan wenn ;
Mez, kamarad, pell 'zo, Frañcès hoh anavez ;
Ho lagad a lugern dindan ho tok nevez.
Eun den eveldoh-c'hwi a hell cheñch gwiskamant,
Evel ma hell an diaoul lakaad dillac eur zant.
Tro-pe-dro, koulskoude e weler beg e fri !
Hag hirio, va henderv, 'm-eus gwelet hoh hini.
Hennez ne cheñch ket liou 'vel ma ra ar stered,
E anaoud mad a reer pa vez eur wech gwelet.

Izaak

Mad, pazeogwir hoh-eus dizoloet va hartou,
D'ho tro bremañ iveau da zelaou va homzou.
Ya, me 'zo deut hirio d'al lanneg da ober
Eul labour gortozet abaoe pell amzer.
Deut on evid diskar houmañ, kroaz ar Goz-Hent.
Mez perag ez oh-c'hwi 'n em gavet war va hent ?

Frañcès

A-berz Doue on deut evid ho kastiza !
Ho teod, den milliget, a dlefen deoh troha,
Ho teod ampoezonet evel hini eun naer
Hag a daol war ar vro ar fank hag ar gevier
A zo en ho kalon. Perag n'oh ket maro
Pell 'zo ? C'hwi, torfetour, ha droug-spered ar vro ?
An dud ker fall ha c'hwi a dlefe beza lazet,
Ne vefe ket kemend a fallagriez er bed.

Izaak

O ! Frañcès, me n'on ket ker fall ha ma soñjit.

Frañcès

Ker fall ! serrit ho peg, n'oh nemed eun toueller,
C'hwi 'zo eur gaouiad koz, eun den vil, eur sorser,
Ha zoken, pell a zo e tlefeh beza bet
Ouz eur pennad kordenn staget berr ha krouget !...
Mad, ema deut an eur hag ez it da baea
Evid kement torfed hoh-eus greet er vro-ma'.
War ho taoulin, sorser, dirag ar Groaz santel ;
Dirag Salver ar bed, plegit ho penn, izel.

Izaak

Din-me dirag eur mén 'larit plega va fenn !
Nann, nann, dirag eur groaz, plega va fenn, biken !

Frañcès

Mad, gwaz a ze 'vidoh. Ola ! klevit, paotred,
Deuit amañ da weled ar hoz sorser daonet.

Eizved pennad

Frañcès, Izaak, Yvon, Yann, Michel

Yvon

Petra 'zo 'ta, Frañcès ?

Frañcès

Sell, Yvon.

Yvon

Ar sorser

Edom o klask paka abaoe keid amzer.

A ! sorser milliget, degouezet eo ho tro
Da baea kement droug 'h-eus greet e-barz ar vro.

Michel

N'eo ket c'hwi 'h-eus roet d'am zonton deuz Kêrval
Louzou ampoezonet ?

Yann

Ha d'am mamm kemend all !
Mar deo maro va mamm ; O ! sorser milliget,
Bremañ ez eus tri bloaz, c'hwi hoh-eus he lazet !

Frañcès

(*Da Izaak*).

Respondit 'ta bremañ.

Yvon

Va zud-me 'zo er bez
Ha c'hwi eo a zo kaoz, tad ar fallagriez !

Frañcès

Piou a hellfe konta torfejou an den-mañ ?
Rag n'eus ket gwall-bell c'hoaz e oa mestr er vro-mañ.
Mez, hirio, sorser koz, n'hoh-eus den d'ho tifenn.
Alo ! deuit, paotred, degasit eur gordenn,
Stagom al labous-mañ uhel 'beg ar wezenn.
(*Yann a denn eur gordenn deuz e zah*).

Yann

Houmañ am-boa prenet evid staga va zaout,
Gwelloc'h implij 'viti n'hellfen biken kaoud.

Frañcès

(*Da Izaak*).

Da Zoue ha d'an dud petra 'h-eus da lared ?
A-raog mond d'an ifern da gaoud ho konsorted.

Izaak

Goulenn truez ouzoh ne dalv ket kalz a boan
Rag ho kalon a zo ken kaled hag ar mean²³.
Eun dra 'zo koulskoude hag a dlefeh rei din :
Lezel c'hoaz ahanon beteg warhoaz vintin.
(*Lakaad a ra eur glin d'an douar*).

Frañcès

²³ ar mean : ar mén.

A ! O ! konsort, re bell hoh-eus dija bevet ;
Gwelloc'h laza ar bleiz kerkent ma'z eo paket.
En ho sav... C'hwi, paotred, skoulmit mad ar gordenn.

Izaak

A ! muntrer, ra gouezo ar gurun war ho penn
Gand va malloz.

Frañcès

Allo ! paotred, hastom buan
Krouga ar sorser-mañ, rag me 'gred e klevan
Bugale o tostaad.

Yann

Ya, 'maind erru amañ.

Naved pennad

Ar baotred, Aotre kure Pleuwigner, Yann, Yvon, Frañcès, Job

An Aotrou Kure

Devez mad deoh, paotred.

Yann

A ! An Aotrou Kure !

An Aotrou Kure

Ya, me eo, mez hemañ a stlejit evel-se,
Piou 'hellfe beza ?

Yvon

Mad, Aotrou Kure, sellet²⁴,
Gwelloc'h e ve bet deoh na vijeh ket gwelet
Ken abred el lanneg.

An Aotrou Kure

Perag, va mignoned ?

Yvon

Rag war-dro ar sorser edom o labourad.

An Aotrou Kure

Izaak a zo ganeoh ? E anaoud a ran mad.

²⁴ sellet : sellit.

Frañcès

Ez eom d'e lakaad eun tammig da zañsal
En êr, evid gouzoud ma oar ober ar *bal*²⁵
Kerkoulz ha ma ouie laza tud gand louzou.

Yvon

Ni a ya d'e grouga evid e dorfejou.

An Aotrou Kure

Mad, selaouit, paotred, eul labour fall a ret²⁶,
A-raog laza eun den, e rank beza barnet.

Yvon

Hemañ a zo barnet gand oll dud ar harter,
Hag e pep ti, Aotrou, e varo 'houlenner.

Yann

A ! ne vo ket gwelet kalz a dud o ouela
En deiz ma vo kaset d'ar vered da loja.

An Aotrou Kure

Koulskoude, mignonned, kaer ho-po lavared,
Rei ar maro d'eun den, evel-se n'heller ket.

Frañcès

Mad, ni 'ya koulskoude, d'ober outañ diohtu,
Rag warhoaz marteze ne gavim ket an tu
D'ober dezañ paea.

An Aotrou Kure

Da biou e-neus laeret ?

Ar pevar asamblez

Deom-ni.

Frañcès

Kaset 'n-eus ma mamm Yvon d'ar vered.

Michel

Eñ eo 'zo kaoz mar deo va breur mahagnet.

Job

(*Erruet war-lerh ar re all*).

Va hoar-me 'zo maro, eñ en-deus he lazet !

²⁵ ar bal : skrivet evel-se er skrid orin. "an dañs" a vez greet ar "bal" anezañ.

²⁶ a ret : a rit.

Lazet da ugent vloaz, e-kreiz he yaouankiz
Eun deiz ma oa o tond euz eur fest er Genkiz.

Frañcès

N'eus ket war an douar eun all ker fall hag hen.

An Aotrou Kure

Ne dom-ni ket ivez paour-kêz peherien ?
Ha Doue koulskoude a lez ganeom buhez.
Ar hristen a bardon atao gand madelez.
Sellit a-dreg ho kein, gwelit piou or zelaou,
Jezuz ! a zo maro evid or pehejou.
Or Zalver e-unan a houenn drezon-me
Diganeoh, mignoned, pardoni d'an den-ze.

Frañcès

Mad, evel or Zalver, pardonom eur wech c'hoaz.

An oll asamblez

Ya, Frañcès.

Frañcès

Pardonom amañ dirag ar Groaz.
A ! sorser, c'hwi a hell lavared trugare'
D'or Zalver Jezuz-Krist ha d'an Aotrou Kure.

Izaak

Eur bedennig bennag 'livirin evite.

Frañcès

Bremañ e hellit mond ; it, mez a-raog pellaad,
Me ho ped da zelaou eur ger c'hoaz ; klevit mad,
Izaak, tehit hirio da vad deuz ar harter,
Tehit pell deuz ar vro, gand aon marteze
Ne vem ket evidoh ken truezuz bemde' ;
It d'eur vro bennag all da weled ar stered.

Izaak

Klevet 'm-eus ; marteze 'hellim c'hoaz 'n em weled.

Frañcès

Gwaz a ze deoh neuze.

Izaak

(*Etre e zent*).

Me 'garfe e kouezfe
Warnoh malloz an diaoul ha va malloz ive'.

An Aotrou Kure hag ar baotred daoulinet dirag ar Groaz a lavar :
« Pardonit deom on ofañsou evel ma pardonom d'ar re o-deus on ofañset. »

An Aotrou Kure

Paotred, mad hoh-eus greet pardoni d'ar sorser.
Bremañ e hellit mond gand joa, eüruz, d'ar gêr.
Eüruz 'vel kristenien o-deus greet o dever.

Yvon

Kenavo deoh eta, Aotrou, ha devez mad.
Ni a ya da zistrei d'ar park da labourad.

An Aotrou Kure

Mad a rit, mignonned.

Ar baotred

Kenavo deoh, Aotrou.

An Aotrou Kure

Kenavo.

Frañcès

Ha me ya d'al lann²⁷ leun a bikou.

Degved pennad

An Aotrou Kure

(E-unan).

Va Doue, mad 'm-eus greet e denna a zañjer ;
Mad em-eus greet heulia gourhemenn va Zalver.
Gwelloc'h e ve bet din o lezel marteze
Da gas ar sorser fall dirag an Aotrou Doue.
Greet e-neus er vro-mañ d'an dud kemend a zroug
Ma lavare an oll e verite ar groug.
Er wech kenta ne vo truez ebed outañ.
Mez kredi 'ran emaon o koll amzer amañ.
Va skolaer ne zeu ket ; koulskoude peurvuia
E tegouez araozon amañ da studia
E genteliou ; e boan a lak da labourad,
Spered en-deus, me 'gred e ray eur beleg mad,
Setu amañ e zaout hag e zeñved, moarvad
Ne jomo ket gwall-bell war-lerh e vandennad.

²⁷ d'al lann : d'al lanneg.

Per. Per.

Unnegved pennad

(*Per a deu, harpet war breh Frañcès*).

Frañcès

Talavezoud a ra ar boan, Aotrou, da gaoud true' !

An Aotrou Kure

Petra 'zo degouezet ?

Frañcès

Sellit, Aotrou Kure !

Setu penaõz e pae ar sorser ar pardon
On-deus, 'balamour deoh, ni oll roet dezañ.
Eun taol kontell 'n-eus bet, paour-kêz Per, digantañ.

An Aotrou Kure

Eun taol kontell ? Peleh ?

Frañcès

Gwelit, en e galon.

An Aotrou Kure

Ha posUBL 've, va mab ! A ! sorser milliget,
Mond da skei eur bugel ha ne ree droug ebed !
Red eo 'vefe an diaoul e kalon an den-ze
Pa deu war eur bugel d'en em veñji 'vel-se.

Per

(*A-veh ma hell komz*)

Aotrou Kure, ha c'hwi Frañcès, na ouelit ket.
Mervel 'vid va faeron pell 'zo 'm-eus goulenet,
'Vid ma vezo salvet. N'ho-po ket keuz, Frañcès,
Da veza pardonet, rag Doue, eun devez,
'Bardono deoh iveauz.

Frañcès

O ! krouadur santel !

An Aotrou Kure

It, Frañcès, ha diohtu, er harter da hervel
An dud, ar medisin, ma redo d'an iliz
'Vid ar gomunion... Va mab, c'hwi a zo skuiz.

Per

N'hellan ket chom em zav... chomit e va hichenn.
Livirit evidon... da Zoue... eur bedenn...
Lakait ahanon... e-tal ar Groaz...
D'am zad, c'hwì 'lavaro, Frañcès...' m-bo soñj outañ
Er Baradoz... o hortoz anezañ.

An Aotrou Kure

Greet e vezò, va mab, hervez ho polonte'

Per

Mervel.... 'rankan... Kenavo... Aotrou Kure.

Trede lodenn

(*E bali kastell Kêrloaz*)

Kenta pennad

Mathurin

(*E-unan*)

Allaz ! Allaz ! perag n'on ket maro²⁸ kentoh !
Er bez da vihanna 'm-bije kavet ar peoh !...
Marvet 'vijen eüruz en deiz ma 'm-eus gwelet
Va mestr karet o vond da di ar Chartreuzed.
Ha d'e vamm en neñvou em-bije lavaret :
« A ! va itron Anna, a-wallh hoh-eus pedet,
Bezit eüruz, ho mab a deuio d'ho kichenn,
Rag eet eo d'ar gouent da ober pinijenn. »
Allaz ! tri miz goude ez eo lammet er-mêz,
Da veva en e roll, gwasoh eged jamez.
E vuhez 'vid an oll, 'oa eur vez da weled,
E pep korn deuz an ti ganeom 'veze klevet
O toui, blasfemi a-eneb ar Werhez
Hag a-eneb Doue, ar Zent hag an Élez.
Ankounac'haet gantañ an huñvre en-doa bet,
Bremañ e lavare n'ez eus Doue ebed.
O va Doue ! perag n'on ket marvet kentoh ?

Eil pennad

Mathurin, Yvon

Mathurin

C'hwi 'zo aze, Yvon, ra vo ar peoh ganeoh.

Yvon

Perag e komzit din deuz ar peoh, Mathurin ?
Kollet em-eus ar peoh, biken ne deuio din !
Va bleo zoken 'zo deut raktal da veza gwenn
Goude m'em-eus kollet an hini a garen.

Mathurin

Paour-kêz tad, kompreñ 'ran ho poan, eur boan dispar,
Koll ar pez a garer muia war an douar
A zo kaled, dreist-oll pa deu ar gwalleur-ze

²⁸ maro : marvet.

Goude kalz re all ! Poaniuz eo kement-se !
Savit ho taoulagad bremañ war-zu an Neñv,
C'hwi 'welo n'ez oh ket ankaounac'haet gante.

Yvon

A ! siwaz, Mathurin, va-unan on²⁹ er bed,
N'em-bo mui em buhez tamm plijadur ebed,
Tenn e kavan kosaad heb eun tamm karantez,
Va mab Per, ken karet, va merh ha va maouez
'Zo bet e triweh miz gand ar maro sammet.
Va halon baour em hreiz a zo evel rannet.
Perag eo bet Doue ken kaled evidon ?

Mathurin

Dre ma ho kar muioh 'vid ar re all, Yvon,
N'eo ket mad evidoh chom atao da zoñjal
En ho stad hoh-unan, ho-pet soñj er re all ;
Er re 'zo gand Doue ; soñjit ez int eüruz
Ha ne ankoueont ket o zad karantezuz ;
Kement-se a ra vad, ha n'eo ket gwir, Yvon ?

Yvon

Mathurin, ho komzou a ra vad d'am halon.
Evel ma kouez ar glao war ar park dizehet
E kouezont em halon gand ar glahar rannet.
Koulskoude, Mathurin, ne vin ket konsolet
Ken am-bezo kavet ar mab am-eus kollet.

Mathurin

Mad, Yvon, eun dra 'm-eus c'hoaz da lavared deoh :
Doue 'n-eus goulenet ho mab Per diganeoh
Evid beza beleg, c'hwi hoh-eus refuzet.
Livirit din bremañ pe ez eo gwir pe n'eo ket.

Yvon

Ya, siwaz, Mathurin.

Mathurin

Doue 'n-eus kemeret
Ar pez a oa dezañ.

Yvon

N'em-boa Morse soñjet
E kement-se. Bremañ 'welan e gwirione'
Perag on bet skoet gand an Aotrou Doue !

²⁹ on : emaon.

N'em-eus ken da ober nemed plega va fenn.

Mathurin

Bremañ 'klevan ganeoh komzou eur gwir gristen.

Yvon

Ya ! Nag a beherien a welan koulskoude
Hag a zeblant eüruz ha deut mad da Zoue,
Ken eüruz ma klever ar re all o lared
Ra ket Doue atao evel ma'z eo dleet.
Piou e-neus greet biskoaz muioh a fallentez
Eged Keriolet penn-da-benn e vuhez ?
Ha koulskoude piou 'zo eürusoh egetañ ?
Kared 'rafen gweled, ha zoken er bed-mañ,
Doue o kastiza ar peher kaledet.

Mathurin

Peoh, en an' Doue, arabad lavared
Traou 'vel-se ; kement tra 'ra Doue 'zo greet mad,
Doue 'zo eternel, her gouzoud a rit mad,
Hag an oll digantañ o-devo gand largentez
Hervez an oberou greet e-pad o buhez.
Abalamour da ze em-eus poan o kredi
'Hellfe biken va mestr en hent mad distrei,
Goude seurt buhez !...

Yvon

Ya, siwaz, pell a zo
Ema Keriolet dre-oll o redeg bro.

Mathurin

Warhoaz e vezo bloaz m'en-deus on dilezet
Evid mond da heulia relijion an Durked.
Hag abaoe, Yvon, dalhmad 'pedan Doue
Da ober evitañ hervez e volonté'.

Yvon

Mad a rit, Mathurin.
(*Kleved a reer kana, a-bell*).

Santez Anna, mamm a garantez
Taolit warnom eur zell a druez.

Yvon

A ! A ! pelerined,
O tistrei deuz pardon Santez Anna Wened.

Mathurin

Frañcès a zo ganto, anaoud a ran e vouez
Sklêr 'vel hini ar voualh pa gan e beg ar gwez.

Trede pennad

Mathurin, Yvon, Frañcès

Mathurin

Degouezet oh, Frañcès ?

Frañcès

Ya, Mathurin.

Yvon

Petra

'H-eus gwelet a-nevez du-hont e Kêranna ?

Frañcès

Kemend a draou, Yvon, ma vo red din gortoz
Evid o honta deoh ma vezо deut an noz.

Yvon

Kalz tud a oa eno ?

Frañcès

Ya, tud a-vandennou
Deuz kement bro a zo, kalz a wiskamantchou,
An hentchou a oa leun, biskoaz n'em-eus gwelet³⁰
En eur gêr ker bihan, kemend a dud bodet.

Mathurin

Santez Anna, moarvad, a zo kontant neuze !
Mez n'hoh-eus ket, Frañcès, klevet eno doare
Keriolet ? E-touez eur vandenn evel-se
E heller meur a wech kleved euz e gelou.

Frañcès

Nann, Mathurin, dièz eo heulia e roudou,
Mez, ma karit gortoz, eur paour am-eus kavet
War an hent, hag a zeu da Gêrloaz da gousked.
Gand hennez, marteze, 'klevot ar heloiou.
Ar beorien aliez, 'oar kalz a nevezentiou.

Yvon

³⁰ n'em-eus gwelet : gwelloh : n'am-oa gwelet.

C'hwi hoh-eus e bedet da zond beteg amañ ?

Frañcès

'M-eus ket. E-kichenn ar feunteun e Kêranna
Me am-eus e welet evid ar wech kenta.
E zillad dislivet, e pep korn peñseliet,
Ha goloet a fank er hrevier dastumet,
A verke mad d'an oll 'oa braz e zienez ;
Ne gaver ket paourroh, an oll o-doa truez.
Ne houleñn koulskoude digand den aluzenn,
'Vdel ma ra peurvuia ha dre-oll ar beorien...
Goude-ze m'her gwelas a-nevez en iliz,
En e gichenn edon penn-da-benn an ofis.
Biskoaz n'em-eus gwelet³¹ den ebed o pedi
Ker kaloneg hag eñ. Zoken, huanadi
Ree iveauz beb mare, hag euz e zaoulagad
Savet war-zu an Neñv, me am-eus gwelet mad
Daelou puill o kouenza ; c'hoant em-boa da houleñn
A beleh e teue warnezañ ker braz anken.

Yvon

Perag n'hoh-eus ket greet ?

Frañcès

Nann, n'em-eus ket kredet.

N'eus ket c'hoaz eur hard-eur me am-eus e welet
War an hent ; dond a ra goustad, gand kalz a boan,
Moarvad 'n-eus c'hoant beza amañ da vare koan.

Mathurin

Gwelloh e ve bet deoh, Frañcès, chom d'her gortoz.

Frañcès

Diskouezet em-eus dezañ an hent ; a-raog an noz
E vezо degouezet.

Mathurin

'Vidom-ni, Bretoned,
Eur paour a zo eur breur, 'vid e zegemer
Roer atao dezañ gwella tamm 'zo en ti.
Ma karit ez eom d'hen diambroug on-tri.

Yvon

'Daim ket pell, Mathurin, ema erru amañ.

³¹ Biskoaz n'em-eus gwelet : n'am-oa gwelet.

Pevare pennad

Mathurin, Frañcès, Yvon, Keriolet (*goloet a draillou*).

Keriolet

Ra vezor Zalver e peb leh benniget.

Ar re all

Hag e peb amzer e ano santel meulet.

Mathurin

Poent eo deoh degouezoud, ezomm 'h-eus da goania.

Keriolet

Ya, rag skuiz-maro on, n'hellan mui 'n em stleja,
Ha poan vraz em-eus bet o tond beteg amañ.

Mathurin

Marteze n'oh ket bet beteg-henn er vro-mañ ?
Livirit deom, mar plij, euz peseurt bro ez oh ?

Keriolet

Er vro-mañ pell a zo ne deuan ket pelloh.
Ha buan 'vez ankoueet an neb na weler ket.

Frañcès

E Kêranna hirio me am-eus ho kwelet
Evid ar wech kenta. (*A-gostez*). Anaoud a ran ar vouez.

Keriolet

Me am-eus ho kwelet, ha meur a wech, Frañcès.

Frañcès

A !

Yvon

A !

Keriolet

Ankounac'haet hoh-eus kroaz ar Goz-Hent ?

Mathurin

(*Oh ober sin ar Groaz*).

A ! ma Doue, eñ eo.

Frañcès hag Yvon

Eñ eo, Keriolet.

Keriolet

Ya, eñ eo e-unan.

Frañcès

Ar paour am-eus gwelet
E-kichenn ar feunteun ?

Mathurin

Ha posUBL e vefe
Ez eo c'hwi, va Aotrou, a welan er stad-se ?
C'hwi, gwechall ker kempenn, ken nêt war ho tillad,
C'hwi eo a zo aze dirag va daoulagad ?

Keriolet

Ya, me eo, Mathurin, me eo ar mab prodig,
Me eo Keriolet en eur stad reuzeudig.
Ne gavot mui ennon Keriolet gwechall.

Mathurin

Ma vez gwir kement-se ? Marteze 'klevan fall.

Frañcès

A ! ya, ma vefe gwir !

Keriolet

Beteg fin va buhez,
Va halon 'm-eus roet da Zoue, d'ar Werhez.
Va madou, va buhez, kemend 'm-eus 'zo dezo.

Mathurin

A ! Gwerhez venniget, kavet hoh-eus ho tro
Digand an droug-spered ha deuz e grabanou,
Euz an ifern zoken c'hwi denn an eneou.
Bennoz deoh.

Keriolet

Mathurin, ya, mil bennoz dezi,
Rag degaset he-deus an diaoul d'am zavetei.

Yvon

An diaoul ?

Frañcès

Soñj hoh-eus, Aotrou, penaoz gwechall

E komzeh a Zoue ha deuz ar spered fall ?
C'hwi 'halve anezañ evid dont dirazoh,
Hag an diaoul spontet a dehe pell diouzoh.

Keriolet

Ya, siwaz, me neuze 'oa falloh egetañ !
Ha gouzoud mad a ran 'tlefen beza gantañ
O leski en ifern !

Frañcès

Me 'zoñj 'veldoh iveauz.

Keriolet

Ar Werhez koulskoude he-deus bet c'hoaz truez
Diouzin, peher paour, brasa peher 'zo bet !
Ra vo ano Doue e peb amzer meulet !

Ar re all

(Asamblez)

Ra vo ano Mari gand an oll benniget !

Mathurin

Ma n'oh ket c'hoaz re skuiz, Aotrou, kent mond en ti
E rafeh, me a gred, plijadur deom on-tri,
Ma karfeh konta deom penaoy hag e pe bro
Hoh-eus kavet, Aotrou, an hent da zond en-dro ?

Keriolet

Re hir 'vefe din kont deoh va istoar³²,
Hag an heol a welan dija tost d'an douar,
Koulskoude em-eus mall da gonta va buhez
'Vid meuleudi Doue hag enor ar Werhez.
Edon o veaji, n'eus ket ouspenn tri miz,
Hag o tremen Loudun³³, e-tal dor an iliz,
Ha me o kleved trouz a-dreuz ar mogeriou,
An diaoul a oa eno oh ober e ardou,
Hervez ma lavaras neuze din eur vaouez.

Frañcès

An diaoul e ti Doue !

Keriolet

Ya, re wir eo, Frañcès !
Oll e ouzoh e hell an diaoul beza lojet

³² istoar : va istor. Evid ar rim.

³³ Loudun : eur gêr euz ar Vienne. Selled ouz "Jean Rohou : Le Christ s'est arrêté à Rome", pajenn 163. Eno e oa bet, e 1632, eun afer sorserien brudet-tre, e kouent an Ursulined.

Kerkoulz e korv eun den hag e korv al loened,
E korv an dud zantel 'vel e korv ar re fall.
Mad, en iliz eta, e Loudun e Bro-Hall.
An diaoul a ree kalz freuz, ha zoken euz ar mēz
M'her hleve o yudal, hag oll chas ar barrez
Oh harzal asamblez, sur on ne rafent ket
Kemend a dodillon hag am-eus-me klevet...
Setu-me en iliz... Biskoaz war an douar
N'em-boa klevet kemend a drouz hag a zafar !
Me 'welas dirazon eur seurez posedet,
En he horv, 'vel er gēr, edo an droug-spered.
O ! gweled a ran c'hoaz he bizaj distronket,
Eonenn en he genou, me 'wel he dent skrignet.
He bleo dispaket oll a niye war he fenn,
War leurenn an iliz e ruille diskempenn.
He daoulagad spontet a luhe 'vel goulou...
A-wech em-boa lakaet va zroad war an treuzou
An diaoul a oa enni raktal 'n-eus va gwelet,
Setu-eñ da yudal kalz muioh egred jamez ;
A ! A ! Keriolet, te eo, buan er-mēz,
Da betra dond amañ, te peher heb e bar ?
N'ez eus ket unan all ker gwaz war an douar ;
Perag e chomez-te, amañ 'vid va zelaou ?
Evid kleved moarvad istor da behejou !
Mad, selaou 'ta, va breur... Komañs a ra neuze
Da lared kement tra 'oa kuzet em buhe',
An traou louz ha mezuz, pep tra 'lavare din,
Ha me e zelaoue war bennou va daoulin.
Ha goude pep torfed, eñ din a lavare :
« Bremañ e weler mad ha just ez eo Doue !
An Élez a zo bet taolet da virviken
E tan flamm an ifern 'vid eur pehed hepken ;
Malloz da gement 'zo ! ha Doue a andur
Ahanoh-c'hwi evel eun tad e grouadur. »
Goude-ze 'lavaras e oa deut ar Werhez
D'am zenna deuz ar fank, d'ober din cheñch buhez
En eur lavared din e oa va flas merket
E-kreiz puñs an ifern e-touez ar ra zaonet ;
Ha ma tleen eun deiz en neñv beza salvet
E oa dre vadelez ar Werhez venniget.
Kement-se 'oa a-walh 'vid ranna va halon.
Raktal digand Doue me a houlenn pardon.
'Vel Sant Per, va fatron, war lein menez Kalvar,
Me 'ouelas va fehejou gand keuz ha gand glahar !
Hag evel ma taoler an teil e-mēz ar hraou,
E kalon eur beleg me 'daol va fehejou.

Hag adaleg bremañ hag e-pad ma vevin
E klaskin ober vad ar muia ma hellin...
C'hwi 'hell hen lavared d'an oll ha tro-war-dro,
Ar maner, ti va mamm, hiviziken 'vezo
Ti ar re n'o-defe, er bed-mañ, ti ebed,
Ti ar paour, ar re glañv, ti an dud vahagnet.
Digorit frank an nor evid an oll boaniou,
Dezo 'vezo va nerz, va gwad, va oll vadou.
D'an oll dud aflijet e hellit lavared
E kavint degemer e ti Keriolet ;
Ha marteze 'hellin gand va aluzennou
Paea justis Doue evid va fehejou !

Mathurin

(*O ouela*).

Gouela 'rankan, Aotrou, n'on ket evid mired !
Ar maro, pa garo, a deuio d'am herhed,
Rag bremañ ez on sur e hellin ho kweled
E-tal ho mamm en Neñv, e-kreiz an eürusted.

Keriolet

Mathurin, hir eo c'hoaz an hent, ar haleta
A zo c'hoaz da ober. Pedit Doue eta
'Vid ma roio din nerz da ren mad va buhez.

Yvon

Evidoh, 'vel gwechall, me a bedo bemdez,
Aotrou. Evidon-me c'hwi a bedo iveau,
Evid m'am-bezo nerz da zougen va buhez !

Keriolet

Petra hoh-eus, Yvon, perag ez oh bremañ
Ken trist ? Ha bez 'z eus du-ze eun bennag klañv ?

Yvon

Tost da vloaz zo dija, ez eo goullo va zi !
Va gwreg, va merh, va mab ! emaint er bez o-zri !

Keriolet

Petra 'h-eus lavaret ?

Mathurin

Allaz, ar wirionez !
E dud a zo maro !

Keriolet

Va fillor Per, iveau ?

Yvon

Ya, siwaz, Aotrou !

Keriolet

A ! Yvon, ho krouadur

'Vel eur boked lili, dirag Doue 'oa pur,
Fank ar bed n'en-doa ket e ene labezet.
Doue, m'her goar bremañ, en-deus e gemeret
D'ar mare ma tleen, me va-unan, mervel,
'Vel-se, e leh eun diaoul 'n-eus kemeret eun êl.
A ! bremañ me gompren perag an droug-spered
A lare din penaoz eun all en-doa paeet
Da Zoue eul lodenn deuz dle va fehejou.

Frañcès

Ya, e vuhez, 'vidoh, e-neus roet, Aotrou.

Yvon

Bremañ e lavaran meuleudi da Zoue,
Mad e-neus greet kemer va hrouadur ; ha me
Da hortoz ar maro, gand joa a labouro.

Keriolet

Em hichenn-me, em zi, Yvon, c'hwi a vevo,
Gand Mathurin ha me, ha c'hwi, Frañcès, ive'.
Pevar e Kêrloaz ne vezint ket a re
'Vid servij ar beorien a deuy da glask bara
A-berz an Aotrou Doue, a-berz Santez Anna.

Yvon

Mad, chom a rin ganeoh, distag eo va halon
Deuz pep tra.

Keriolet

Ha c'hwi, Frañcès ?

Frañcès

Me 'ray 'vel Yvon,

Rag kredi stard a ran n'ez eus netra ebed
Hag a dalvfe kement hag eur vuhez roet
Da ober vad d'an oll, heb gouleñn gopr ebed.

Mathurin

Mad eo, va mignoned, hervez ma komprenan
C'hoant hoh-eus da ober eur gouent nevez amañ.
Dre-ze digand Doue me a houleñn beva c'hoaz

Evid beza santel evel eur gwir vanah.
Mez, Aotrou, c'hwi 'zo skuiz, deom bremañ d'ar maner,
Warhoaz, da ober vad, ni or-bezo amzer.

Pempved pennad

Keriolet, Mathurin, Frañcès, Yvon, Izaak

Izaak

Aotrou, me a zo deut a-berz an droug-spered
'Vid degas deoh da zoñj en amzer dremenet.

Keriolet

Izaak ?

Izaak

Me va-unan.

Frañcès

Ar sorser milliget.

Yvon

Va Doue, em halon bervi a ra va gwad
P'ema muntrer va mab dirag va daoulagad.

Izaak

Aotrou Keriolet, n'hoh-eus ket va hlevet ?

Keriolet

Ma teuit a-berz an diaoul n'hoh-eus nemed tehed.

Izaak

A ! A ! ar respont-se a hortozen diganeoh !
Pell a-walh koulskoude 'm-eus labouret 'vidoh,
Ha bremañ, pa'z on koz, pa'z eo va horv torret,
'Livirit din mond kuit ha pell ouzoh tehed !
Euz ho perz, den fallagr, kement-se a hortozen.

Keriolet

(A-gostez)

Va Doue, ra hellin e zelaou penn-da-benn.

Izaak

Me 'zo deut koulskoude d'ho kaoud hag heb krena.
N'eo ket evid goulenn nag arhant na bara,

Mez evid lavared deoh c'hoaz kenavezo,
Rag sur on, hebdale, va eur a zegouezo
Da vond da gaoud ar mestr 'm-eus atao servijet.

Keriolet

Izaak.

Izaak

Peoh, me ho ped, rag me 'rank lavared
Ar pez 'zo em spered. El lanneg, eun nozvez,
An diaoul a fellas dezañ din-me en em ziskouez.
« Izaak, 'lavaras-en, gwerzet eh-eus din-me
Da vuhez, da spered hag iveau da ene ;
En distro eh-eus bet eur galloud heb e bar
D'ober ar burzudou brasa war an douar,
Galloud da barea tud kerkoulz ha loened
Dre vertuz eur yeotenn d'hanternoz kutuillet ;
Te 'anavez pep tra, n'eus ket gwelloc'h profed,
Te a lenn en daouarn kerkoulz hag er stered.
Bremañ ne houllennan diganez 'med eun dra,
Ro din Keriolet, hag e teui da veza
Mestr war an diaoulou. » Labouret 'm-eus abaoe
Evid plijoud d'an diaoul ha gounid hoh ene.
Mez, deh da noz, siwaz, 'm-eus lennet er stered
E oa oll labour ha va oll boan kollet.
Hirio 'rankan plega, anzao 'ran dirazoh,
Rag ar Werhez iveau 'zo a-du ganeoh.
Rag-se, digand an diaoul me em-eus goulennet
Dond d'am herhed amañ, e ti Keriolet.

Keriolet

Gwelloc'h 've deoh goulenn pardon digand Doue.

Izaak

N'ez eus mui na truez, na pardon 'vidon-me.
Va ene, pell a zo, d'an diaoul a zo gwerzet.
Ha terri ar marhad, bremañ ne hellan ket.
Deus eta, deus Satan, va mestr ha va roue,
Deus hirio da rei din ar priz euz va buhez.
(*Pellaad a ra*).
Ra vo dor an ifern dirazon digoret
Pazeogwir eo serret dirag Keriolet.
(*En em laza a ra*).

C'hwehved pennad

Keriolet

Va Doue, spontuz eo maro an den daonet.
Mil bennaoz deoh eta, O ! Gwerhez venniget,
Rag c'hwi, evel eur vamm, a zo deut d'am zenna
Euz kreiz ar fallentez, an dizurj ar brasa.
Meuleudi deoh eta ha d'hoh ano santel.
Ra vez e peb leh laret a vouez uhel
Ar vadelez 'h-eus bet evid Keriolet,
'Vid ar peher brasa 'zo bet biskoaz er bed.
Gwerhez trugarezuz, grit c'hoaz eul labour all,
Grit ma vez ker mad ha ma'z eo bet fall.

Ar re all

Grit ma vez ker mad ha ma'z eo bet fall.

Mathurin

Biskoaz war an douar ne don bet ken eüruz.

Keriolet

Deom bremañ d'an iliz da gana trugarez
D'an hini 'zo anvet, dre-oll, Mamm a druez.

Mathurin

Da houllenn diganti ma viot beleg eun deiz.

Frañcès

Bremañ e kredan stard ar pez na greden ket,
Kredi 'ran gwelloh e nerz ar chapeled,
E galloud ar Werhez hag en he harantez.
Kredi 'ran e klevin an oferenn nevez.
Meuleudi da Zoue ha d'e Vamm ar Werhez.

Taolenn diweza

(*An Aotrou Keriolet a ya da lavared e oferenn genta*).

Meulom Doue, va mignonned,
Gand an Aotrou Keriolet,
Ar bleiz kriz 'zo deut da veza
Eun oanig dous, an tenerra.

An droug 'n-eus greet dre behejou
A bae dre forz aluzennou,
Bremañ ez eo tad ar beorien

Hag or skwer dre e binijenn.

Braz eo bet e fallagriez,
Brasoh 'vezo e zantelez,
Rag gras Doue ker gallouduz
Gand fank a ra mein prisiuz.

Hirio, e-kreiz al levenez
E kano e ofern nevez ;
Ha ni 'gano beteg an noz
Gloar da Zoue er Baradoz.